



16

Salaün ar Foll

PEZ-C'HOARI E DAOU ARVEST

Laket e Gwerziou



MOULET E BREST

4, ru ar C'hastell, 4

1923

EMGLEO SANT ILTUD EO PERC'HEN AL LEVR-MAN.

FB
891.
682
LEB

10736

Académie bre

Salaün ar Foll

PEZ-C'HOARI E DAOU ARVEST

laket e gwerziou




MOULET E BREST

4, rue ar C'hastell, 4

1923

EMGLEO SANT ILDUT EO PERCHEN AL



Diocèse de
Quimper & Léon
Diocese of Brittany

Document numérisé en 2016

Salaün ar Foll savet e yez Gwened gant an A. Bayon a zo bet troet diwarnan e yez Leon, Treger ha Kerne gant an A. Perrot; eun dra vat eo lakat evelse skridou Gwenediz e yez Leon, Treger ha Kerne ha skridou Leoniz Tregeriz ha Kerneviz e yez Gwened, rak seul-vui ec'h en em zarempredo ar Vretoned en doare-ze, ha seul nebeutoc'h a zishenvedigez a vezo etre o doare da gomz ha da skriva, hag, en hent-se, eun deiz a deuio, — pa vezo ivez digoret pelloc'h, evel m'eo dleet, holl skoliou ar Vro d'ar brezoneg, — ha ne vezo mui e Breiz, adalek Lok-Maze Penn-ar-bed, tre beteg an Naoned hag adaleg Roazon, tre beteg Penn-marc'h, nemed *eur yez, eur feiz hag eur galon !*

SALAÜN AR FOLL

Pez-Choari e daou Arvest

C'hoarierien :

Salaün ar Foll.

Melar } skolaerien e Lesneven.
Budok }

Iltud, ar piler gwez, *bocher*

Ar Markiz.

Daou zoudard.

Loeiz,

Ronan,

Yann,

Hervé,

Arzel,

Kaourintin,

Person Elestreg.

Ha meur a hini all.

tud o vont da foar Lesneven.

An traou a dremen wardro ar bloaz 1358 el lec'h m'eman
bremen iliz kaer ar Folgoat.



SALAÜN AR FOLL

Kent ma sav ar gouel.

AR C'HOMZER a lavar.

Bretoned, ya breudeur,

Pa daolomp eur zell war amzer gwechall hor bro, —
ha vad a ra hen ober a-wechou pa ne vez ket a c'hoant
da fallgaloni e kreiz tristidigeziou an amzer vremen, — e
rankomp lavaret:

Bras ar burzudou a zo bet
E Breiz en amzer dremenet.

Evelato, n'eus ket bet digouezet a re galz kaeroc'h,
m'oarvat, eget ar re a c'hoarvezas, e kalonenn Eskopti
Leon el lec'h a hanvomp breman ar Folgoat, hag a lakeas
hon tud koz da zevel an iliz a zo eno, — 500 vloaz a zo —
daoulinet ker kaer, en he sae vean dantelezet, dirag Intron
Varia al Lili.

Ha setu perak hon eus kavet mat dont da zisplega dira-
zoc'h, hizio, e berr gomzou, burzudou ar Folgoat.

Eno gwechall, wardro hanter ar XIV^{et} kantved, e veve eun den, Salaün e hano. Karet a rea ar baourentez, — souezusa tra, pa weler pegen troet eo bet a-holl viskoaz an dud da redet warlerc'h an danvez, — hag e kreiz e baourentez e kavas ar furnez hag an eurusted:

Dindan ar soul, en e lochenn
Ar paour a c'hell c'hoarzin laouen;

e kreiz e goad ivez, Salaün a c'helle kana ker seder ha tra:

Aman, pell diouz an trouz
Hag holl savar ar bed
Ar mêziou am c'helenn kerkoulz
Hag ar gouizieka doktored.

Ar gwez bras en avel
A bep tu ' zo fouetet
Koueza ' rin ma savan uhel
Suroc'h eo eur vertuz kuzet.



ARVEST KENTA

Ar re a c'hoari an arvest-man:

MELAR, BUDOK, ILTUD HAG ALL

En eur c'hoad, e kichen an Elestrek, wardro ar bloaz 1358.

Eur feunteun, a gleiz, gwaskedet gant eur wezenn zero; e korf ar wezenn, a zehou, skeudenn ar Wer-c'hez. Kel lies gwech ma komz Salaün ouz ar Wer-c'hez e sell etrezek ar skeudenn-ze. Melar, eur c'hlin ouz an douar a ev dour gant eur grogenn sant Jakez.

BUDOK azezet war eur mean en e gichen,
e zourn dindan e elgez.

E lec'h dizrei d'ar skol, Melar...

MELAR, eur pennadig goude.

Ha petra 'ta.

Budok?

BUDOK

Me a garfe chom aman da veva.

MELAR

Pebez sonj!

BUDOK

Ker kaer eo an amzer hag ar c'hoad
Kel laouen! Eun dousder hep par a domm ar gwad.
« Hic segura quies et nescia fallere vita ».

MELAR

Gwir eo.

BUDOK *en eur zevel.*

Kleo peger brao e kan al laboused
Da embann en o yez meuleudi mestr ar bed!

MELAR

Avia tum resonant avibus virgulta canoris.

BUDOK

Peger fresk eo 'r bleuniou, peger fresk al leton,
Eun tamm bara, Melar, evit terri va naon,
Gant eul lomm eus dour skler ar feunteun-man kuzet
Ken doun dindan ar roc'h ma red hep m'her gwelfet
Ya! gant dour ha bara me a c'hellfe bemdez
Rei he gwalc'h d'am c'halon ha maga va buhez

MELAR *en eur zevel ivez.*

Buhez da gorf, Budok, nann buhez da spered
Rak da vaga hounnez, mont d'ar skol a zo red.

BUDOK

Ya! Ya! ha koulskoude ma vefen 'vel Salaün,
'Vel Salaün ar foll a vev, aman, end-eeun
Hep goulenn, abaoe ma 'z eo ganet netra
Nemed, p'en devez re a naon, eun tamm bara
Ma vefen diskiant 'veldan, ne zonjes ket
E vefen ken eurus o tremen dre ar bed?
Eurusoc'h e vefen marteze?

MELAR

Marteze!

Piou 'oar? Hini n'her goar nemet Doue. Met me,
Me zonj ar pezh en deus 'r muia talvoudegez
Ennomp eo dres ar spered-ze a zisprizes,
O veza ma 'z eo red mont d'ar skol d'her maga
Ar spered-ze a splann e pep den eo a ra
D'ezan kerzet e kreiz tenvalijenn ar bed
Warzu Doue, a-dreuz hent bras an traou krouet
Ha kentoc'h 'vit c'hoantat o stad evel ma res
E vije gwelloc'h d'it, Budok, kemer truez
Ouz an dud diskiant, evel ouz an dud keiz
A jom tenval o daoulagad pa darz an deiz.
Dall int holl. Te vije eurus ma vije dall?
Dall a spered pe dall a gorf, an daou 'n em dalv.
Gwelloc'h eo d'it kentoc'h trugarekat Doue
Ha mont d'ar skol hep keuz hag hep glac'har, difre...

BUDOK

Mont a rin hep glac'har, met keuz am bo atao
D'ar c'hoajou doun ha d'ar meziou digor, pa vo
Red d'eomp edoug c'houec'h miz beva en hon ti-koz
Mogeriou bras tro-dro d'ezan 'vel d'eur ger gloz.

MELAR

Deomp dillo.

BUDOK

Ne 'z in ket ken n'am bezo gwelet
Salaün ha gouezet hag eürus eo er bed.
Setu!

MELAR

Met te 'oar vat michans, penaoz ez a
Bep beure da chapel an Intron Varia
Da Lesneven evit klevet an oferenn.
Ha dont a ra en dro d'ar c'hoat, en eur c'houlenn
A di da di, a zor da zor, an aluzen.
E c'hortoz? Mall eo mont; an amzer a dremen
Buan.

BUDOK

Met setu hen! Deomp pelloc'h.

MELAR

C'hoant da gomz gantan, gra.

Met ma peus

BUDOK

Nann.

MELAR

Perak?

BUDOK

Aon am eus

Da gaout eur respont fall.

MELAR *'vel pa véfe nec'het o klask gouzout pe hent kemeret*

Chach ganez da skasou
Neuze. Pe en hent-man?

BUDOK

Pe en hent-zé?

MELAR

O daou

Ez eont da Lesneven. Deomp en hent-man da welet.

BUDOK

Ma faziomp?

MELAR

E teuimp war hor c'hiz, en eur red!

Che!

Mont a reont kuit.

SALAÜN

O Gwerc'hez Vari, Gwerc'hez, Gwerc'hez Vari
Ker brao ha c'houi ne 'z-eus ket bet biskoaz hini.
Hini ker koant ne vo biken. O Mariâ.
Va Mamm!...

Bennoz d'eoc'h va Doue 'vit ar bara.

*Ober a ra sin ar groaz gant ar bara goude beza en em
laket en e azez war ar roc'h.*

En hano 'n Tad, ar Mab hag ar Spered santel
O va Doue, c'houi 'zo meulet, gant pep bugel!

Ra vo meulet ivez ho Mamm, ra vo meulet
Hoc'h hano, o Mari, o Gwerc'hez venniget
Benniget dreist an holl gwraez ha dreist an holl
Elez...

Kennerzit, Mari, ho paourkêz foll.

*Hen a zebr e vara goude beza e zoubet en dour, ha gou-
deze e tiskenn er feunteun beteg e ziskoaz; pa 'z eo
deut er mez anezi e krog en eur barr hag e kan a
bouez e benn en eur en em vransellat. Epad an am-
zer-ze.*

AR GANERIEH

Ar peoc'h santel
Gant an avel
A zav eus ar c'hoajou didrouz
Etrezek Mamm
Vat ha dinamm
Hor Zalver ganet war ar plouz.

*
**

Rouanez kaer ar baourentez
Enor d'eoc'h a-berz an dudou
A en em c'hra hed o deizioù
Paour a spered pe a zanvez.

*Epad ma kaner ar c'houblad diveza, Salaün en eur en
em vransellat a respont: O Maria! Derc'hel ra d'en
em vransellat betek ma 'z eo galvet dre e hano.*

BUDOK

Sell 'ta, faziet omp!

MELAR

Ar c'hoat en deus kement
A henchou hag a ya hag a deu ma tihent
Eun den dillo a-walc'h.

BUDOK, pa zistro.

Sell! petra 'stourm outan?

MELAR

Eun tomma ' ra d'e gorf evel e kreiz ar goanv.

Ouz e c'helver.

Salaün!

SALAÜN a baouez da en em vransellat

Ah!

MELAR

Kleo 'ta, n'out ket bet re spontet
Ouz hor gwelet?

SALAÜN ne respont ket — BUDOK o tostet outan.

Lavar, perak ne gomzes ket?
Lavar d'eomp ha kavet az peus an eursted.
Aman pell diouz an trouz hag holl savar ar bed?

SALAÜN

Gwerc'hez Vari!

MELAR

Anaout a res Mamm hon Aotrou
Hag he hano dalc'h mat a zailh eus da c'henou.
He c'haret kalz a res klaoustre?

SALAÜN

O Maria...

Maria!... O Gwerc'hez Vari!

MELAR, fallgalonet, a-gostez.

Koulz eo netra!

Ne oar ket e-unan zoken petra lavar;
E vrasa plijadur eo pignat ouz ar barr.
Kenavo Salaün.

BUDOK en e gichen, goustadik.

Salaün, eurus out

Aman? Komz, ha diouz ma vo e rin evelldout!

MELAR, en eur vont kuit.

Perak koll hon amzer gant eur pôtr hep spered?
Laosk hennez.

ILTUD, ar piler gwez, e vouc'hal war e skoaz.

Oh! Setu kompagnunez, me gred,
Salaün!... Dervez mat d'eoc'h ho tri!

AR SKOLERIEN

D'eoc'h ivez

ILTUD

Hag ar skol? Mall eo d'eoc'h tostet, potred, anez
E klevoc'h trouz p'en em gavoc'h e Lesneven

MELAR

Dillo a-walc'h, ya, rak striz eo warnomp al lezenn.

ILTUD

Mat evelse, c'houi a deuio da veza tud
Gouiziekl 'vel ar venec'h a oa gant sant Iltud
Gwechall goz hag ar re a zo c'hoaz e mouster
Landevennec hizio an deiz! Feiz, mat a rêr
Mont d'ar skol ha deski pa oar yaouank 'veldoc'h;
An innosant kêz-man ne vo ket desketoc'h
Tamm 'bed evit kosat, hag ar memez komzou
Eus ar beure d'an noz a gouez eus e c'henou.

AR SKOLERIEN

Pe seurt komzou?

ILTUD

Gwerc'hez Vari! O Maria!

MELAR

Pelec'h e labourit?

ILTUD

Du-hont, tostik ama,
Emaon o pilat gwez da varc'heg Gwikelle
Va Mestr.

MELAR

Ar Markiz rus.

ILTUD

Chut! en aon n'ho klefe
Rak dont a ra bemdez, koulz pe goulz, da welet
Va labour hag ec'h heuilh an hent-man hed-a-hed
Rak mignoned vras int ar foll hag hen,

BUDOK

Fall eo

Vit ar re all!

ILTUD

Ha n'eo ket gwellat a raio
 Siouaz, ar paourkêz den, tre ma chomo danvez
 Gantan. Eur yalc'had vat a denno eus ar gwez
 A ziskarin d'ezan er bloaz-man c'hoaz 'velkent
 Met kement en deus a gemer ar memez hent,
 Eun hent louz, va zud keiz, Feiz! Doue hor barno!
 Ha! Salaün, mut out? Petra, klanv out hizio?

SALAÜN

Nann!

ILTUD *d'ar re all*

Nann! eun dra bennak en deus. Ha! marteze
 Eo bet goapaet e ker gant ar c'hoz vugale.
 Ken dous eo koulskoude, ma 'z eo eur gwall bec'hed
 Ober d'ezan eur wech nemet ken bep kantved
 An distera glac'har.

MELAR

Ne gomz tam bed muioc'h

A-wechou?

ILTUD

Eo! meur a wech pa vezan pelloc'h
 Du-hont, e kan...

BUDOK

E kan? Gwerziou?

ILTUD

Ya! ya! ar pez

A deu en e spered. Oh! eun drugar e vez
 E glevet ha teuler a rankan a gostez
 Va bouc'hal p'en em ro da gana.

BUDOK

Alies

E kan?

ILTUD

Ya! Meur a wech ar c'hoad holl a dregarn
 Gantan ken c'houek, ker brao, ma savan va diskouarn
 Raktal 'vit her selaoui.

BUDOK

Kan d'eomp eur ganaouenn.

ILTUD

Oh! biken n'her graio, kaer ho pezo goulenn.
 Red eo e vefe e-unan.

Mont a ra kuit.

MELAR

Pellaomp eta!

BUDOK

Eurur ar re izel; Doue o uhela.

Mont a reont kuit.

SALAÜN e-unan

O Gwerc'hez venniget, êt int holl gant'o hent,
 Setu me adarre, va-unan kaer 'velkent.
 Int a gred ez oun foll; met ya, foll oun ivez
 Ha ne faziont ket... foll dre ar garantez
 'M eus evidoc'h, o rouanez va c'halon baour.

O sellet ouz e feunteun.

Feunteun kuzet ken doun ma klevêr trouz ho tour
 Heb hêr gwelet, aman e sonjan hep paouez
 En hini a hanver feunteun ar wir vuhez.
 Feunteun guzet vid an darn vras, nan evidon
 Rag enni e kavan holl dudi va c'halon.

Hen a gan hag hekleo ar c'hoat a respont: O Maria.

O feunteun kuzet vid an holl
 Hag anavezet gant ar foll
 Diouallit hi vit hen digoll
 Diouz dour brein an eien diroll.

*
**

O Gwerc'hez c'hlan vel al lili
 Me venn miret evidoc'h c'houi
 Mar hen-difennit o Mari
 Va c'halon ken aes da zaotri.

An ogrou a gendalc'h da c'hoari epad ma komz aman warlerc'h.

Bennoz d'eoc'h va Doue da veza grêt ker brao
 An nenv hag ar c'hoajou hag ar gwez bras a zao

Kên uhel a-benn d'eoc'h o fenn hag o divrec'h.
 Bennoz d'eoc'h, va Doue, trugarez d'eoc'h, mil gwech,
 Rak m'hoc'h eus graet ker brao ar Werc'hez ha ker glan
 Vit he c'haret, he servicha, hi he-unan
 Am eus kuitaet va zud, pep tra d'am ugent vloaz
 Evit beva aman, paour, war an douar noaz,
 Er c'hoat-man a garan, pell diouz savar ar bed
 Diouz ar bed fall ha brein, yit beva disprijet
 Ya! met tostoc'h d'ezi ha d'eoc'h, o va Doue.

Trei a ra warzu skeudenn ar Werc'hez.

O va Intron, va Mamm, o splanner va ene,
 Me oar a-walc'h ar bed a glasko va gounid
 Hag a ginnigo d'in kement tra a ginnig
 D'ar re a venn hen heuilh dre ar fank hag ar pri
 Flijadur ha danvez hag enor, tri dra, tri,
 Hag a ginnig d'an holl hag ar re o c'hemer
 A welan ac'hanen warno liou ar vizer
 M'o gwel ac'han ouz taol, ar memez boued bepred,
 Ar memez naon warlerc'h er galon strafuilhet.

An ogrou a ehan da c'hoari.

SALAÜN o tistrei.

Ah! ar markiz!

AR MARKIZ gant eur mignon d'ezan

Ah! ah! Salaün, eun doare!
 N'ouzes ket! brudet out pell bras hag ar roue
 Az klask. Setu eun den a zo deut eus e berz
 Bremaik beteg va forz da c'houlenn war da lerc'h.

AR MIGNON, a gostez.

Na pebez mojenn!

AR MARKIZ d'ezan.

Laosk 'ta.

Krenv.

Ar roue en deus c'hoant

Da gaout eur foll d'e lakat da c'hoarzin. Kontant
Out da vont gant henman da Baris, Salaün?
Eno ez po enor, plijadur, hag end-eeun
Ne vanko d'it nemet paourentez. Gra dillo
Da zohj. Lavar d'eomp ha kuitat a ri da vro,
Ar merc'hed koant?

A gostez.

Bremaik e facho.

Krenv.

Hizio dres

Am eus c'hoant da glevet ganez petra zonjes
Eus Mac'harid Penmarc'h, eur gaer a bennherez;
Ma vije da bried eurus bras e vijes.
Ne gleves ket?... Ez eomp d'he c'hask d'it: Ar Werc'hez
Ne vezo ket laouen eus a ze a zonjes,
Nann; ar Zent eus an nenv, va mab, n'o deus ket mui
Si ebed hag eur si bras eo ar gwarizi.

AR MIGNON o tiskouez Salaün.

Mut eo!

AR MARKIZ, a gostez.

Ya, mut e vez pa stagan da farsal
Gantan.

Krenv.

Me a baeo sonerien 'vid ar bal

Salaün. Respont 'ta. Mouzet out. Goas a-ze
N' glaskin maouez ebed d'it ken. M'o dalc'ho me
Holl evidon... Kenavo Salaün.

SALAÜN

Kenavo.

AR MARKIZ en eur ziskouez ar c'hoat
gant troad e skourjez.

Sellit, an tu-ze tout eus ar c'hoat a gouezo.

Pellat a reont.

SALAÜN o sellet etrezek enno.

Ya! vit sevel arc'hant hag aour d'eoc'h den euzus
Da ziskenn c'hoaz dounnoc'h er bouilhennou mezus
Ma vevit c'hoaz, eur bloaz bennak, ar c'hoat a-bez
a gouezo sur d'an traon, nebeut ha nebeut bemdez
Eur c'hoat ker brao, ker fresk en deiz, ker c'houek en noz
Hag eun iliz, iliz va Mamm, va baradoz.
O koajou doun, koajou klouar, na me ho kar
N'oun ket perag e klask ar vouc'hal o tiskar.

AR GANERIEN

Ar peoc'h santel

Gant an avel

A zav eus ar c'hoajou uhel

Etrezek Mamm

Vat ha dinamm

An eneo glan hag izel.

*
**

Ar plijadurioù 'ro ar bed
Holl war eun dro ne dalvont ket
Eur predig hepken tremenet
Aman gant ar muia karet.

Salaün epad ar c'houblad diveza a respont: O Maria.

SALAÜN o tistrei.

Trouz a zo!

Sellet a ra etrezek ar c'hoad.

Soudarded! Va mirit, O Mari!

ILTUD d'ar zoudarded.

Ya, dre aman war eun e kerzoc'h difazi
An hent-man ho kaso da vare'hallec'h ar ger.

AR ZOUDARDED unan pe unan anezo.

Trugarez d'eoc'h, den mat.

ILTUD

Ouz ho kortoz emaer
Du-hont, rak dec'h veure e pep bourk tro-war-dro
Oa embannet e vijec'h bet hizio er vro,
O sevel soudarded yaouank da gas ganeoc'h.
Daoust ha pe da vare, pelloc'h, e teui ar peoc'h?

AR ZOUDARDED

Den n'her goar

ILTUD

Gwas a-ze! Laza 'rit tud atao?

AR ZOUDARDED

Ya! ya! bep wech ma kavomp tro, hor micher eo.

ILTUD

Trista micher!

KENTA SOUDARD

N'eo ket tristoc'h 'vit da hini
Te gant da vouc'hal zir a laz evelomp-ni
Te daol ar gwez d'an traon hag a lamm diganto
Ar gwad hag ar gwrizioù a ro buhez d'ezo.
Ni gant hor c'hlezeier a stlap tud ouz torgenn
Hep kaout tamm droug outo p'o gwelomp o tremen
'R zoudarded zo paeet da ober lazerez
Evel m'out te paeet evit pilat ar gwez

ILTUD

Oh! ya, met...

KENTA SOUDARD

Met petra? Evelse eo, va den.
Pep micher a zo mat ma laka aour melen
Da drouzal meur a wech er yalc'h hag evach c'houek
Da virvi barz er gwer, a-raok diskenn er beg
Deus ganeomp, mar kerez!

ILTUD

Ah! nann, hag e vije
Roet dek mil skoed d'in!

AR ZOUDARDED o tiskouez Salaün.

Hag hennez?

tostat outan.

Piou out te?

ILTUD

Eur paourkêz innosant...

AR ZOUDARDED o c'hoarzin.

Oh! da welet hennez

'Zo furoc'h egedout...

ILTUD

Ment a ran d'am dervez

Kenavo!

En eur vont kuit.

Pebez tud!

AR ZOUDARDED da Zalaün.

Pe hano 'z peus? Komz 'ta.

SALAÜN goude eur pennadig.

Salaün.

KENTA SOUDARD

Salaün

A gostez.

Deut eo 'velkent.

Krenv.

Kleo 'ta

Salaün, ne d'out ket kontant da zont ganeomp
Oh! sell 'ta, na pebez samm arc'hant a lakeomp

D'it en da zourn. Euruz e vezi en hor mesk
N'eus forz pe lec'h ez aimp, bara, gwin ha kig fresk.
Ne gleves ket? Respont, rag erru out en oad
Da gemer eur vicher. Dizasun eo da goad
Deus d'hon heul d'ar brezel

AN EIL SOUDARD

Ober a ra e foll

Evit ma vo laosket da veva en e roll
Didrabas ha didrouz, n'eo ket gwir?

KENTA SOUDARD

Ya! m'oar vat

Rak hen a venn atao beva hep labourat
'Vel m'en deus graet beteg vremen.

Da Zalaün.

Gouzout a rez

E rank an den gounit ar pezh a zebr bemdez.
Ganeomp her gounezi. Deus eta; met gant piou
Emaout; pe gant Montfort pe gant Bleiz? Pe seurt liou
A zougez? Lavar d'eomp.

SALAÜN

N'oun nag a du Montfort

Nag a du Bleiz, tud keiz!

KENTA SOUDARD

Dre an diaoul hag e forc'h

Evit piou out te 'ta?

SALAÜN

Vit ar Werc'hez Vari.

KENTA SOUDARD

Mar d'eo en doar'-ze eo, chom aze d'he fedi.

AN EIL SOUDARD

Foll mat eo!

KENTA SOUDARD

Deomp a c'han. Doue-ra wellai d'it, paourkêz

Pellat a reont.

SALAÜN

O va mamm vat, kredi a reont er follentez

A ziskouezan aman dre garantez 'vidoc'h;

Met i eo a zo foll, an dud keiz, ya folloc'h

'Get ar re o deus bet an nebeuta spered.

Goulou hor spered a dalv d'eomp hervez ma sked

Kalz pe nebeut. Oh! met n'eo ket ouz an dra-ze

Da c'houzout ma 'z omp foll eo e taol pled Doue

Hen a zell ouz ar pezh a zeu en hor sonjou,

Ouz ar sklerder a daol hor spered war an traou,

Mar deo glan, mar deo eün, ouz ar pezh a c'hoantaomp

Hag ouz ar vagadur yac'hus pe nann a roomp

D'hor c'halon.

Goude eün tammig ehan.

Paourkêz tud! a gred eo gant arc'hant

E c'hellint dont a-benn da c'hounit va asant.

Ne ouezont ket penaoz gwechall me a zo bet,

Pa varvas va c'herent, pinvidik ha karet

Hag am eus roet holl va madou d'ar beorien.

O trei warzu ar Werc'hez.

'Vit miret evidoc'h, va c'halon digailhenn.

O tistrei.

Ah! setu c'hoaz tud all! gwir eo. Marc'had a zo

Hizio e Lesneven. Koueriaded int. Ra vo

Ar peoc'h ganto.

*Gwelet a rear e traon leur ar c'hoari koueriaded o cha-
cha war stagou o loened.*

LOEIZ

Oh! oh! setu ar foll, pôtrez

Pellañt al loened, dillo, en aon ne vent skoet

Gant eur c'hlenved bennak a-berz ar sorser-ma.

It ganto dre an hent all 'ta!

SALAÜN azezet e tal e feunteun.

O Maria.

RONAN

Mat, perak klask neuze dont ganto, dre ama.

YANN

Tostoc'h eo!

LOEIZ

Tostoc'h eo, sur a-walc'h; met p'ema
An droug war lez an hent ouz ho kortoz, me gred
Eo gwell tec'het, da vihana, gant al loened
Oh! oh! p'o gweloc'h o vervel, vel ma varvas
Va beoc'h me, dilun diveza ez eus bet bloaz,
E vezoc'h dizonet, en eur wech, mil guez.

RONAN

Eur penn-danvad 'zo bet marvet d'in-me ivez
Gant eur zell a daolas ar foll-ze warnezan
Eun deiz, ma tremenen aman.

LOEIZ

An amprevan
Ma karfe da vihana, pa vez deiz yarc'had
Koulz ha pa vez deiz foar e Lesneven, pellat,
Ha lezel frank an hent gant an dud. Ah! emaoe'h
En em gavet! Neuze eo e tostay ouzoc'h,
An droug gantan, sellit.

SALAÜN en eur astenn e zourn

Salaün a zebrfe

Bara!

LOEIZ

Ya! ya! kanfart, met red'eo, evelse,
E c'hounid, da genta. Krenv out, ha yac'h, d'az oad
Eun den a dle gouzout labourat. Pe sort gwad
A red en da c'hwazied eta? Gwad an noblans?
Kerz neuze betek Lesneven da glask eul lans

Hag eul loan gant ar re a dle beza eno
O sevel soudarded da Vontfort, duk ar Vro,
Kemer eur stad bennak, soudard pe labourer
Rak d'an oad az peus eo eur vez chom hep micher
Ha beza o veva gant an aluzennou.
A dapes, deiz ha deiz, pa 'z eus en da vemprou
Nerz a-walc'h da zerc'hel eur bal pe eur c'hleze
Ha da heuilh eur vicher bennak evel ma tle
Ober peb unan. Eur vez eo!

SALAÜN

Gwerc'hez Vari!

LOEIZ

Ya! Gra da ziskiant. Ne dromples ket hini.
Foll out, ya, da welet! Met pa zav c'hoant ganez
Da ober droug d'an dud, neuze da zorserez
A c'hoari ha ne vezes ket ken diskiant.

YANN

Mat, eleiz koulskoude, a lavar eo eur zant

LOEIZ

Eur brao a zant. Mar deo red beza sot brema
'Vit plijout da Zoue, setu eur c'haer a dra.

RONAN

Piou 'oar petra eo hen?

Da Zalaün.

Piou out? hag a belec'h

Out deut aman da jom?

LOEIZ

Respont 'ta, mab ar zec'h.

Te eo her gouzout mat a reomp az peus miret
 Ouz ar zegal hag ar gwiniz da rei o hed
 Er bloaz-man koulz ha kent. Ma torr ar c'herc'h te eo
 'Zo kaoz. Te eo a ra d'an avel fall, pa dro
 En da spered, c'houeza war ar vro, hed-a-hed
 Adalek Kastell-Paol, tre betek Penn-ar-bed
 Ar c'hlenvejou kousket, ne vern pe lec'h ez es,
 Te o dihun, pezh fall ha dre ma tremenes
 E varv ar chatal ha zoken ar vugale.
 N'eo ket gwir?

AR RE ALL

Eo, gwir eo!

HERVE GOZ

Nann.

LOEIZ

Ah!

HERVE

Nann, Loeiz, kement-se

N'eo ket sur.

LOEIZ

Re zur eo!

HERVE

Me n'am eus ket klevet

Ken eo breman eur penn kristen o lavaret
 'Traoù anezan. Ha koulskoude am eus treuzet
 Ar c'hoat-man alies.

LOEIZ

Hoc'h unan?

HERVE

Va loened

Ha me ha droug ebet ne zigouezas morse
 Na ganen na ganto.

LOEIZ

Brao 'maoc'h gantan neuze.

ARZEL

Ne 'm eus ket da glemm anezan ken nebeut

KAOURINTIN

Me

Am eus doujans kenan 'vit an dud ar seurt-ze.

AR RE ALL

Ah!

KAOURINTIN

Me zonz int tostoc'h egedomp da Zoue.

LOEIZ

D'an diaoul kentoc'h, d'an diaoul, mil malloz!

HERVE

Oh! ha te

Ouz piou e tostaes, lavar deomp, hep glabouz
 Pa gomzes gant kement a gounnar hag a drouz

Eneb eur paourkêz potr hep spered a c'houlenn
Bara ouzit?

LOEIZ *en eur zevel e skourjez, an troad d'an nec'h evit skei.*

Malloz!...

HERVE

Loeiz, sell ouz va bleo gwenn.

Laosk da fouet a gostez ha selaou eun aviz.
En amzer ma vleunie ennoun va yaouankiz
Ez eus bet desket d'in kaout doujans e kenver
Ar re goz ha dinerz, ar pezh a zizonjer.
Bremen re alies, rak piou 'zo dinerzoc'h
Eged eur paourkêz sot?

LOEIZ

Tavit, mar plij ganeoc'h.

N'emaomp ket en iliz, aman hag a hent all
D'ar person eo prezeg pa vez red, mat pe fall,
Me zelaou e gomzou, da zul, nann ho re c'houi.

Mont a ra kuit.

HERVE

Gwas a-ze!

SALAÜN

Salaün a zebrfe bara.

HERVE *en eur rei bara d'ezan.*

Del,

Va mab, bennoz Doue d'it.

SALAÜN *o trugarekat.*

O Gwerc'hez santel.

HERVE *en eur vont kuit gant ar re all.*

N'oar netra ebet ken.

KAOURINTIN, *chomet da ziveza.*

Oh! mat e vije d'in

Rei d'ezan ivez eun dra bennak, mar doun fin,
Rak gant tud ar seurt-se gwella 'zo da ober
Eo en em lakat en o grad vat, pa c'heller.

*Pellat a ra goude beza roet eun tamm
eus e vara da Zalaün.*

SALAÜN

Oh! pebez boked kaer am eus tapet va Mamm
Da ginnig d'eoc'h... Me daol war ho kalon dinamm
An holl zismegansou 'zo bet grêt d'in hizio...
Bokedou an douar a goll o liou dillo...
A voenv, met va re me a jomo bepred kaer,
Ar bokedou a daol an dud warnon, m'o serr
A vriad gant ar spenn a zo outo; me lamm
Ar spenn, ar pikou lemm, m'o diframm tamm ha tamm
M'o mir ganen, ha d'eoc'h me ro bleuniou hep drein,
Bleuniou c'houez vat, m'o c'hinnig d'eoc'h war va daoulin.
Grit ma vin disprijet, muioc'h c'hoaz gant an holl,
Gant an holl... Vidoc'h c'houi hepken, ar paourkêz foll,
A viro e spered hag e galon digor
Da ziskouez d'eoc'h eur garantez doun 'vel ar mor.

Goude eun ehan oc'h en em zistrei.

Ah! setu an Aotrou person, va c'hovesour,
Gwerc'hez Vari, bezit bepred, war va sikour.

AR PERSON

Doue ra 'z pënnigo, Salaün.

SALAÜN

Mil bennoz
Doue d'eoc'h, Aotrou Person... Met skuiz oc'h... Penoz
Tud klanv ho peus?

AR PERSON *a gostez.*

Petra a lavarfen d'ezan

Krenv.

Ya! ya! Korn pe gorn, er barrez, e vez tud klanv,
Salaün, hep paouez, a gorf pe a spered.
Tud klanv a vez dalc'hmat.

SALAÜN

Gwas a-ze.

AR PERSON

N'out ket bet

Klanv, biskoaz, te?

SALAÜN

Biskoaz.

AR PERSON

Te koulskoude, hervez
Ma leverer eo a sko, dre fallagriez
An dúd hag an traou... gwasoc'h out 'get ar brezel
A lavare d'in bremaik, a vouez uhel,
En eur doui, ar goueriaded am eus kavet.
Gwasoc'h out vid ar vosenn...

SALAÜN *gant tristidigez.*

Ya! ya! i a gred

An dra-ze.

AR PERSON

Ha setu perag e skanvbennont
Hag out deut da veza, paourkez, sorser ha spont
Ar Vro... Oh! o fec'hed a gouezo warnezo..
Met...

SALAÜN *gant anken.*

Met petra?

AR PERSON *gant douter.*

Warnout ivez e kouezo.

SALAÜN

Warnoun, Gwerc'hez Vari.

AR PERSON *hep gourdrouz.*

Laosk ac'hanon, selaou
Da gomz d'it breman, pa n'eus nemedomp hon daou.
Te eo 'ro tro d'ezo da doui 'vel ma reont

SALAÜN

Aotrou Person!...

AR PERSON

Pell 'zo, abaoe ma klevont
Bep seurt brud ac'hanout.

SALAÜN *gant nerz.*

Sorc'hennou

AR PERSON

Me 'oar vat,

Met kement-se a lak an diaoul da labourat.
An dud a gomz hag a lavar 'bep seurt diotach
Diwar an dour; gwasoc'h dindan nerz an evach.
Klask a res, emezo, louzou ouz ar stered,
En noz, hag e taoles an droug war al loened,
...War an dud. Te eo c'hoaz a sko ar gwez frouez,
A vir ouz an heol da domma. Oh! eun druez
Eo o c'hlevet. Perag ivez ober da foll
Evel ma res, aman, e ker, a-wel d'an holl.

SALAÜN

Oh! Aotrou Person, c'houi 'anavez ac'hanon,
Ha betek ar goueled e lennit em c'halon.
Am anaout a rit koulz ha m'her gran va unan.

AR PERSON

Ya! Salaün ha setu perak, dres, e teuan
Da anzañ gant ruster ouzit ar wirionez
Met o sonjal 'v'lato, komz d'it gant karantez.

N'emaout ket en hent mat, nann, va mab, an dra-ma
A zo ken etrezomp, an Intron Varia
A zo test, Salaün, aman, am eus dalc'het
Ganen bepred ar pezh a hanves da zekred,
Sekred ar follentez a ziskouezes dre holl
Evit miret ouz da ene da vont da goll.
Met gwell eo d'it hiviziken, mar am c'hredes
Beva 'vel ar re all... hervez ar wirionez.
Ar wirionez a lavar 'n deus Doue roet
Madou d'it: ouz o rei d'az nesa az peus graet
Mat: selaouet az peus kenteliou ar Zalver
Pa lavar d'eomp 'vit hen heuilh gwell, 'n em zizober
Eus kement tra a c'hell pounnerât hon ene;
Seul-vui eo skanv an den, seul gwell e c'hell bale.
Mat az peus graet eta; met Doue 'n deus roet
Madou all d'it ouspenn; ar madou-ze: gened
Ha yaouankiz ne fell ket d'in komz anezo.
Tremen a raint, va mab, vel ar vuhez, dillo.
Met ar spered 'zo bet roet d'it gant Doue,
Petra 'z peus graet gantan? E guzet abaoe
Mil bell. Ya! e guzet a res ar spered-ze
Kel lemm, ker fur, ker kaer roet d'it gant Doue.
Kablus eo an hini a flastr e zaoulagad
En eur vouga enno ar splannder 'vit lakat
An danvalijenn yen da vont d'e heul bepred
Kablusoc'h an neb a zisprij e spered
Betek mont da drei kein d'ezan dirag an holl
Ha kaout e blijadur o tremen 'vit eur foll.

SALAÜN

Aotrou Person, ma ran an diskiant 'velse,
N'her gran nemed exit plijout gwell da Zoue

AR PERSON

Nann! Salaün, biskoaz den n'en deus lavaret
 Evit beza eun deiz e touez ar re zalvet
 E vije red ober ar foll war an-douar.
 Diwarbenn kement-se n'emaomp ket en arvar,
 Na te na me: « eurus ar re baour, ar re zous,
 Ar re a gar ar peoc'h hag ar vuhez didrouz
 Eurus ar re a zo truezus e kenver
 An nesa ». A lavare gwechall Hor Zalver,
 Met, pas eurus ar re a zisprij o spered
 'Vit plijout da Zoue ha beza disprijet
 Muioc'h gant an dud.

SALAÜN

Ya! fazia 'ran m'oarvat..

AR PERSON

Gwell e vije bet d'it paourkêz pinvidikat
 Da spered, tamm ha tamm, ha krenfat anezan
 Gant sikour da nesa ha n'eo ket e lezel
 Ken dister e c'halloud hag hini eun ezel
 Ne reas netra biskoaz... Te a oa koulz ha me
 Galvet d'eur garg santel gant an Aotrou Doue.
 Beleg, ya, Salaün, beleg, te 'vije bet
 Er bed-man, eur splannder 'vit an dud dianket.
 Eur galon leun a nerz ha leun a drugarez
 Vit an dud glac'haret: eur feunteun a vuhez
 'Vit kalz! te 'vije bet hader ar wirionez
 'Lec'h beza 'vel breman, eur benveg didalvez.

SALAÜN

Ya! gwir eo! re wir eo! Aotrou Person, m'her gwel
 Diskennet oun 'velkent, re izel, re izel!

Sonjal a rean goude m'em bije dilezet
 Va bro, roet va aour d'ar beorien, ha klasket
 Eul lochennig aman, e kreiz ar c'hoajou bras
 Pell diouz ar bed, ha diouz an trouz hag an drabas,
 E chomje c'hoaz neuze ganen eun dra... eun dra
 Talvoudusoc'h eleiz 'vit madou ar bed-ma,
 Eun dra hag en dije bet laket ac'hanon
 C'hoaz da denna lorc'h anezan, Aotrou Person.
 Ar pec'hed a vije deut da zaotri va c'halon,
 Am eus klasket kerkoulz ha n'eo ket hep rezon,
 Miret dalc'h mat ato, didrouz, dibec'h ha glan
 'Xit ar Werc'hez Vari, ya, viti he unan.
 O va Doue, a liviris, ne jom ket mui
 Ganen 'met va spered, met hen a c'hell saotri
 Va c'halon... Me 'vevo 'vel pa n'am bije ket
 Hiviziken, dirag an holl, spered ebet.

AR PERSON

Doue hepken a oar piou ac'hanomp war-ze
 A fazi; met lavaret am eus d'it va sonj, me,
 Da berson, da wella mignon, da govesour,
 Goulenn eta emberr, sklerijenn ha sikour
 Ouz Doue! Kenavo.

SALAÜN *evit hen derc'hel.*

Aotrou Person!

AR PERSON

Warc'hoaz

Me zizroio...

Mont a ra kuit.

SALAÜN *fallgalonet*

Va Mamm, o va Intron, biskoaz,
 N'am eus ket gouzanvet eur boan ker bras, ker kriz;
 N'emaon ket ken en hent merket gant an Iliz,

Oh! an ifern am losk! Va ene ' zo en tan
 Oh! Mari distanit ar boan a c'houzanvan
 Pe anez gant ar zamm a bouez war va c'halon
 E vougin... Va lazet ho peus, aotrou Person,
 N'emaon ket en hent mat. Faziet oun! Gwerc'hez
 Vari! Me ' venn gouzout ganeoc'h ar wirionez
 Anez da-ze, lazet e vin, gant va enkreiz.
 Diskuezit d'in ho sked, steredenn va buhez.

Ar Werc'hez a en em ziskouez d'ezan d'e gennerzi.

Ah! ah! deut oc'h, va Mamm, gwir eo eta emañ
 War an hent merket d'in: Trugarez d'eoc'h Intron.

AR GANERIEÑ

O Madelez, o Madelez hep par
 An Intron Varia
 A deu war an douar
 Na souezusa tra
 O Madelez, o Madelez hep par.

AR BOBL

O Gwerc'hez dous ar Folgoat
 Hor Mamm hag hon Intron
 An dour en hon daoulagad
 Ni ho ped a galon...
 Ouz hor Breiz-ni, pa zellit
 A bep tu tro-war-dro
 Sklêr hag anat e welit
 Oc'h rouanez hor Bro.


Respont ar Werc'hez

Eus va zu, Breiziz fidel,
 Ah! n'hen dizonjit ket
 Me ' roio d'eoc'h va skoazel
 Keit ha ma vlot er bed.
 Ha pa gwitaot ho traonienn
 Me c'hoaz, ouz ho kortoz
 A vo, gant ho kurunenn
 War dreujou 'r baradoz.

AR BOBL

O Gwerc'hez dous ar Folgoat
 Hor Mamm hag hon Intron
 An dour en hon daoulagad
 Ni ho ped a galon,
 Ouz hor Breiz-ni, pa zellit
 A bep tu tro-war-dro
 Sklêr hag anat e welit
 Oc'h rouanez hor Bro.





EIL ARVEST

AR C'HOMZER *a lavar.*

Burzudus e doug e vuhez, Salaün a zo bet burzudusoc'h c'hoaz goude e varo; e vuhez a oa bet laouen, laouenoc'h c'hoaz e voe e dremenvan ha bleun gwenn al lili diouanet war e vez a embannas dre ar bed kristen a-bez e oa eur zant muioc'h, e baradoz an Aotrou Doue, o pedi evi-domp.

Oh! Bretoned, va breudeur, pebez kentel! Ar gouennou tud all a ra goap ac'hanomp o veza ma n'omp ket ker barrek hag i da zestum madou ar bed-man.

Eur ouenn diwarlerc'h eo bet ar Vretoned, emezo, a-holl viskoaz, en emgann kalet ar vuhez; foll omp; gwir eo o c'homz; ne redomp ket kement-se en holl warlerc'h an danvez ha paour omp, e skoaz darn; mat, ra vo benni-ge hor paourentez!

« Bennoz d'hor paourentez he deus miret e kalon hor gouenn an tri dra a ra d'an den beza denoc'h; an druez evid ar re zinerz; an nerz-kalon e kreiz ar gwallleur; ar gredenn e reizted eun Doue.

Bennoz d'hor paourentez he deus diouallet ouz va gourdadou hag o mibien da vont da stoui dirag al Leue aour.

Bennoz d'hor paourentez he deus miret ennomp ar Feiz, an Esperans hag ar Garantez. Bennoz d'hor paourentez

he deus graet d'eomp dere'hel koun eus a wir hano ar vuhez: *eur gortoz* hag eus a wir hano ar maro: *eun tremen*.

Bennoz d'hor paourentez hag a ra d'ar C'helt gwelet e poullou lagad digig an Ankou daoulagad doueel, doueel, doueel an Hini lakel e kroaz!

Bennoz d'hor paourentez pa 'z eo alc'houez ar baradoz! » (1)


Oh! madou ar bed-man a deus, a vergl, a vez laeret, a vez red o dilezel pa zonjer an nebeuta!

N'eo ket da eta d'eomp en em skuiza kement-se o redet war o lerc'h.

Klaskomp dreist pep tra ar madou hag a dalv ar boan o c'hask hag evel Salaün, Salaün ar Fur, daoust ma oa lezhanvet Salaün ar Foll, en em stagomp hepken ouz an traou hag a dalv ar boan en em staga outo; hor Breiz hag hon Doue, daou hano hag a dle chom koulmet da virviken en hor c'halon gant hini Mari e kreiz.



(1). Tennet eus *Tri nered, Teir bedenn*, unan eus pennadoù skrid kaera J.-P. CALLOC'H en e levr dispar *Ar en deulin*, p. 19 hag 20.



EIL ARVEST

*An arvest-man a dremen er memez lec'h gant ar c'henta.
Gwelet a reñ eur bez, dindan skeudenn ar Werc'hez
hag eul lilienn en eur penn anezan.*

BUDOK, e dok en e zourn, goude eur pennadig

Ar gwez o deus kavet o deliou en dro!
Chom a ra sebezet o welet al lilienn.

A!

Oc'h en em zistrei warzu ar mez.

Deus 'ta Melar, deus 'ta da welet pebez tra
Sebezus!...

MELAR a zigouez.

Na kaera bod lili... 'zo savet
War zouar blot eur bez... eur bez nevez klozet.

MELAR

Bez Salaün: ar foll a varvas dem-goude
M'oamp tremenet aman... penn kenta ' viz here
P'edomp o vont dar skol goude an eost.

BUDOK

Hizio

P'emaomp o vont d'ar gêr ma vijet c'hoaz bet beo

Sur a-walc'h hon divije adarre e gavet
O vransellat e gorf aze, pe daoulinet
Dirak skeudenn zantel ar Werc'hez...

MELAR

Ya.

Goude eur pennadig, oc'h en em zistrei.
Setu

Piler gwez ar Markiz!

ILTUD a zigouez gleb teil a c'houezenn.

Emaint o tont dioc'htu
Dioc'htu... Ah! ah! setu ar skolaerien 'm eus aoun.
Klevet ho peus dija... c'houezi a ran.. skuiz oun.

Oc'h azeza war eur roc'h.

N'edo ket an Aotrou Person er gêr.

AR SKOLAERIEN, a gostez.

Petra

En deus...

ILTUD, berr warnan c'hoaz.

Digouezet eo 'velkent ha dont a ra.
Dont a reont holl...

AR SKOLAERIEN etrezo.

Foll eo.

ILTUD

Oh! na pebez burzud.

Sellit ha pegen hir.

MELAR

Eun dudi eo, Iltud,
Ha c'houi eo ho peus he hadet war bez ar foll?

ILTUD *o poueza war e c'heriou*,
Me?... Met sonjal a rin emac'h o koll
Ho spered vat... Me am bije gellet hada
Ha lakat en eun noz, 'n eun noz da ziyeoda
Eul lilienn ker kaer? Dec'h pa oan tremenet
Aman, en eur zizrei d'ar gêr, an heol kuzet
Ne oa ket war ar bez, na boket, na netra;
Er beure-man, p'oun digouezet en drö. Ah, ya!
Kredi a c'hellit ac'hanoun. Nann, nann, biskoaz
Em buhez, n'oun bet ker sebezet... ha c'hoaz
N'eo ket gant al lili, eo e voen sebezet
Ar muia, met gant ar geriou a oa moulet
En aour war o deliou... Lennit.

AR SKOLAERIEH *o lenn*.

O Maria.

Piou 'n deus graet an dra-ze?

ILTUD

Eun êl, na petra 'ta!
Me a zo aet d'ar red d'an Elestrek da gas
Ar c'helou d'an Aotrou Person; bihan ha bras
An holl a oar breman, eo eur zant eo en deus
Bevet aman, pell diouz an trouz, pell diouz ar freuz
E-unan.

Hen a bella eur peñnad.

BUDOK

Me am boa lavaret d'it Melar
E oa eur zant.

MELAR *gant melkoni*.

Mat, me, Budok a oa bouzar;
Met evel al lili, va feiz a venn sevel

ILTUD *deut en dro*.

Setu an dud o tont eus ar pevar avel

D'ar Person.

Aotrou Person, deut oc'h... sellit... gwir eo?

AR PERSON *a dosta; chom a ra eur pennad da zellet ouz
al lilienn, hag en eun taol e pok d'he deliou; goude
e komz ha dre ma komz an dud, niverusoc'h, nive-
rusa, a en em vod d'e zelaou.*

Gwir tre;

Ar burzud-man eo a c'heden digant Doue.
Tostait holl, va zud vat, an hini a vevas
Aman a oa daoust d'e follentez eur zant bras.
Diwar c'horre hepken edo e follentez
A dalveze d'ezan da guzat e furnez,
Hag e garantez vras 'vit ar Werc'hez Vari
He devoa hen douget d'en em rei holl d'ezi
Gant e spered ker kaer, kel lemm, gant e galonn
C'hlan evel al lili a vag o gwriziou doun
enni; gant e furnez a reas d'ezan kerzet
War eun hent striz ha ne vez ket darempredet
Nemur mui gant an dud: hent striz ar baourentez,
Ar vez, an dismegans, — en despet d'e zanvez

Ha d'an holl enoriou ouz e hano staget.
 Rak eun hano en doa — karet hag enoret —
 Ha breman, va zud ker, m'ho peus c'hoant da viret
 Ar zonz eus Salaün, en ho mesk vit bepred
 Ar zonz eus e furnez hag ar zonz eus e feiz
 Ha meuli war eun dro Mari, Rouanez Breiz,
 E vije mat sevel el lec'h m'en deus bevet
 Ar zant ha war ar bez a vir e gorf bleuniet
 Eun iliz, kaer — 'vel al lili, — kizellet
 E mein galet hor bro; eun tour dantelezet
 Warnezi ken uhel e veg, ma vo gwelet
 Dre Leon a-bez. Red eo e ve karet
 Aman ar Werc'hez adalek vremen betek fin
 Ar bed!

AR BOBL

Gwir eo!

AR PERSON

Diouz an noz ha diouz ar mintin
 Ha da greisteiz e vo red seni ar c'hleier
 'Vit her meuli.

AR BOBL

Gwir eo.

AR PERSON

Ma strewo he splannder
 Hag he sikour war ar vrô a-bez.

AR BOBL

Gwir eo! gwir eo!

AR MARKIZ

Ar c'hoat 'vit an iliz, va unan, m'her roio!

ILTUD

M'en em garg d'her pilat 'vit netra!

AR BOBL

Hag ar vein

Ni, o roio, aotrou Person!

AR PERSON

Eurus e vin.

Salaün, Salaün, kousk mat en da vez doun
 Gwel an enor a reomp d'it te ha d'az Introun
 Az peus karet beteg tremen evid eur foll
 Ha beva er c'hoat-man disprijet gant an holl.
 Eun amzer a deuio e vo gwelet ama
 Breiz-Izel holl ouz ho meuli, O Maria!

*Epad ma weler ar Werc'hez, Salaün daoulinet dirazi,
 oc'h en em ziskouez, en eur splannder gaer a-zioc'h
 ar bobl.*

AR GANERIEH

O Maria, O Maria

Ni ho meul, o Gwerc'hez santel
 Dre m'ho peus c'hoantaet enori
 Ar paourkez foll dous ha fidel
 En deus bevet ouz ho pedi
 O Maria! O Maria!


**

Gloar hag enor deoe'h
 O Mamm ha Gwerc'hez
 Rak benniget oc'h
 O Maria!

**

AR BOBL

Kalz o deus brasoc'h madou,
 Kaeroc'h deskadurez
 Ni hon eus yez hon tadou,
 O feiz, o c'harantez,
 Ni a gar e Breiz-Izel
 Hor brezoneg, hor Feiz
 Koulmet o daou, Mamm zantel
 Gant hoc'h hano e kreiz.



Porched an Ebestel e Folgoat

